


Notadurioù kentañ e geometriezh


a – Ar poentoù :

- Ar poentoù a vez skeudennet gant ur groaz. Anv ar poentoù vez skrivet gant ur pennlizherenn :

Ar poentoù A ha B	
Tresañ :	Notiñ :
	$A ; B$

b – An eeunennoù :


- An eeunennoù zo difin a bep tu. N'o deus hirder ebet !


An eeunenn (d) a dremen dre A ha B	
Tresañ :	Notiñ :
	(AB) pe (BA)

- Dre daou boent disheñvel e tremen un **eeunenn** hag unan hepken !

- Poentoù **a-eeun** zo poentoù hag a zo war ar memes eeunenn.


Da skwer : Ar poentoù E, J ha G zo a-eeun.



M a zo war an eeunenn (PR) N'emañ ket N war an eeunenn (PR)	
Tresañ :	Notiñ :
	$M \in (PR)$ $N \notin (PR)$

- **Sekant** a vez graet eus div eeunenn n'o deus nemet ur poent boutin.



Ar poent-se a vez graet « **poent-skej** » anezhañ.

C eo ar poent-skej etre an div eeunenn (e) ha (f)	
Tresañ :	
	

Evezhiadenn : An eeunennoù a c'hell bezañ anvet gant 2 boent (pennlizherennoù) pe gant ul lizherenn vihan skrivet e-kichen an eeunenn.

c – An hanter-eeunennoù :

- Difin eus un tu hepken eo un hanter-eeunenn.

Kregiñ a ra evel ur segmant (notet gant ur « [») ha kenderc'hel a ra evel un eeunenn.	
<p>Tresañ :</p> 	<p>Notiñ :</p> <p>[AC] pe (CA)</p>
<p>Tresañ :</p> 	<p>Notiñ :</p> <p>[DR] pe (RD)</p>


- Posubl eo kaout un hanter eeunenn skrivet evel-se : [Me)



d – Ar segmantoù :

- Bevennet a bep tu eo ar segmantoù.

Notet e vezont gant krochedoù.

Ar segmant A ha B e bennoù	
<p>Tresañ :</p> 	<p>Notiñ :</p> <p>[AB] pe [BA]</p>

En em briziañ « Rann 2 »

1 - Geriaoueg

Eeunenn : Droite	Segmant : segment	Un hanter-eeunenn : une demi-droite	pennoù : extrémités
Sekant : sécante	En em skej : se coupent	A-eeun : aligné	

2 - Komprenet em eus mat ar rann-se ? Gouzout a ran :

<ul style="list-style-type: none"> - Gouest on da lakaat an diforc'h etre eeunenn, segmant ha hanter-eeunenn - Implijout an notadurioù ([] pe () pe (]) - Implijout ar gerioù (en em skej, sekant...) - Adober ar poelladennoù em eus kavet diaes. 	<ul style="list-style-type: none"> - Je suis capable de faire la différence entre une droite, un segment et une demi-droite - Utiliser les notations ([] ou () ou (]) - Utiliser le vocabulaire (se coupent, sécante...) - refaire les exercices que j'ai trouvé difficile.
---	--

3 – LABOMEF : Gallout a rit implijout al lec'hienn <http://labomep.sesamath.net/> evit pleustriñ.

4 – BLOG : mont pelloc'h ganti pe evit donaat an degouezh : <http://nikolaz.unblog.fr/>



5 – DORNLEVR :
Pajennoù 148 poent 1 nemetken.

